



KEMENNADENN GELAOUÏÑ
COMMUNIQUE DE PRESSE
d'an 23 a viz Ebrel / 23 avril 2022

A-benn ur miz e loc'ho Ar Redadeg

1 mois avant le départ de la Redadeg

Kengred, sportel, sevenadurel, bevet a-stroll ha gant plijadur, tremen a raio dre 5 departamant Breizh a-hed 2022 km ha dre 291 kumun.

Evit ar 8vet Redadeg e 2022 e loc'ho ar Redadeg **d'an 20 a viz Mae eus Gwitreg betek an 28 a viz Mae da gWened.** / *Solidaire, sportive, culturelle, populaire*

et festive, la course parcourt les 5 départements bretons sur 2022 kms en 2022 en traversant 291 communes. Pour sa 8ème édition, la Redadeg aura lieu du 20 au 28 mai de Vitré (35) à Vannes (56).

1/ Gwerzh kilometradoù enlinenn / La vente des kilomètres en ligne

1150 km a zo bet tizhet ar sizhun-mañ. Chom a ra neuze tro-dro 870 km da werzhañ. **Pediñ a reomp an holl brezhonegerien pe tud a blij dezho sevenadur Breizh hag ar brezhoneg, tud an tiez-kêr, an embregerezhioù hag ar c'hevredigezhioù da brenañ ur c'hilometr ha da zont da redek ganeomp.** / *1150 km ont été atteints cette semaine. Il reste donc environ 870 km disponibles. Nous souhaitons que se mobilisent tous les bretonnants, celles et ceux qui aiment la culture et la langue bretonnes, les mairies traversées par cette Redadeg, les entreprises et les associations, tous mobilisés pour courir et participer à la Redadeg en 2022.*

2/ Perak redek evit ar brezhoneg ? / Pourquoi courir pour la langue bretonne ?

Ouzhpenn bezañ un darvoud plijus tro-dro d'ar yezh eo Ar Redadeg un digarez brav evit broudañ implij ar brezhoneg er gevredigezh a-vremañ hag e Breizh a-bezh. Gwerzhet e vo ar c'hilometradoù d'an dud, d'ar strollegezhioù, d'an embregerezhioù, d'ar c'hevredigezhioù, da lâret eo d'an nep a fell dezhañ kemer perzh en darvoud a-benn skoazellañ ar brezhoneg. Bountet ha douget eo ar youl-se gant ar bobl ha pep hini a gemer perzh evit tizhout ar palioù ha skoazellañ sevel raktresoù nevez. **Abaoe 2008 omp bet gouest da reiñ 777 000€ en dro en holl. 473 100 € a zo bet roet da Ziwan hag ar peurrest da raktresoù liesseurt.** / *Outre l'événement festif qui permet de vivre un moment de plaisir partagé, la Redadeg permet de collecter des fonds pour favoriser le maintien et l'usage de la langue bretonne au quotidien et sur tout le territoire. Les kilomètres sont vendus aux particuliers, aux collectivités, aux entreprises, aux associations, c'est à dire à toute personne privée ou morale souhaitant contribuer à l'événement et apporter son soutien à la langue bretonne. Depuis 2008 et à ce jour, nous avons pu redistribuer 777 000 € au total. Dont 473 100 € à Diwan, le reste étant attribué à des projets divers.*

3/ **Diskouezh eo Breizh ur vro dibar gant ur bobl leun a startijenn hag a ijin. Ur bobl o tifenn e yezh hag e sevenadur, ur sevenadur a ya d'ober liested ar bed, hag an holl a oar pegen pouezus eo an temz spered-mañ er mareoù-mañ. Dav eo deomp lâre pegen pouezus eo hon grizhioù, hag ar yezh o vezañ lod pennañ ar grizhioù-mañ, evit bevañ eurus en hor vro degemerus d'ar sevenadurioù all, d'an dishenvelderioù. Breizh a-bep reizh !** / *Montrer que la Bretagne est un pays sans pareil, avec un peuple plein d'énergie et d'imagination. Un peuple qui défend sa langue et sa culture, une culture qui contribue à la diversité du monde, et nous sommes nombreux à mesurer l'importance de la diversité culturelle en ce moment. Il nous faut montrer l'importance de nos racines, et la langue est l'élément clé de ces racines, pour bien vivre en notre pays accueillant et ouvert aux autres, aux différences. Breizh a bep reizh !*

Darempred / Contact :

Cyril Lelong 06 13 30 19 49 cyril@ar-redadeg.bzh



www.ar-redadeg.bzh